

l 343
et

CHANSON CLOAREC PEMPOUL.

Var eun ton superb.

Entre qærlic Pempoul ha stang an Abaty
 Eus eur c'hloarec yaouanc o poursu e studi,
 Hac en deus composte eur zon d'e vestres coant,
 Evit e basselans ha decor tud yaouanc.

Divar menez Crec'h-Noa, pa vezan em repos,
 Me a ell hep fazia contempli eiz paros :
 Kerity hac Yvias, Perros ha Lanviniec,
 Plouzec ha Plourivo, Plounez ha Piorenne.

Ouspen e contemplan ar pêvar elemant :
 Ar môr gant e lestri e costez al levant,
 An douar er c'huze eol, fructifiet gant poan,
 An aer a ziouc'h va fenn caëroc'h eguet an tân.

Ouspen e remerqan costez tri dioces :
 Sant-Brieuc ha Treger, ha Dol hemm tromplerez,
 Extremite Bro-Sauz ha Rouantelez Franç,
 Hanvet scol ar vertuz, cabinet ar sciag.

Noblançou a blezanç, decoret a goajou,
 Qestel, ha tiez-goard carguet eus a armou,
 Enezenou fertil, antouret gant Neptun,
 Hac havrou freqantet var o zro zo commun.

Ma ve libr va lagad, en desse plijadur
 D'ar c'houz n'apparis mui mab ena an natur,
 O velet ac'hane mouvamant an énou,
 Sclérijen ar stered hag ar planedennou.

Goechal, pa voan disqib d'Aristot ha Platon,
 N'en devoa va speret nep satisfaction
 Nemet o vedita var leviou ar sciag,
 Ouz o c'honsidiri n'em boa qen passetans.

Amzer a vag peb tra, n'en deus mui a charmou,
 Gouarner ar galon am dalc'h en e lassou :
 Eur pech zo en Pempoul zo re gress a ressort,
 Am dalc'h da languissa en despet d'am oll effort.

Reculit oll adren, rarentou Chrec'h-Noa,
 N'oc'h eus mui a bouvoar da rei d'am c'halon jos;
 Er gærlic a Bempoul emâ va plijadur,
 Eno ma va mestrez, eur guenet dreist-natur.

Calliop, Polywni, Terpsichor, Erato,
 Urani, Melpomen, Euterpe ha Clio,
 Ha c'houi ive Thali, c'hoar leun eus a firnez,
 Chouï a voar an doare, me invoq hoc'h adres.

Exaucit va feden, Jenitor Jupiter,
 Quittait an deverti hac antreit en qær ;
 Chouï a voar an doare, quittait prompt ho plac,
 It da gaout va mestres, grit d'in antren e graç.

Secondit Cupidon da essât e gounit,
 Ouz e rebellion implich da oll credit :

Gra dezi va c'haret qement a m'e c'haran,
 Pe laq-hi da zévi guenen er memes tân.

Poursoiv auei erfis, lavar dei, Immortel,
 E deus e Kerity eur servicher fidet ;
 Represantit dezi e zon prest da verval,
 Mar quendalc'h da veza em andret ger cruel.

Mercur, ambassader, tad ar sperejou mad,
 Messager eloquant, cas dezi va mennat ;
 Digor da ziou esquel ha niij prompt dre an aer,
 Hep tenna da halan, disqen ebars en qær.

Abord-hi em reget, gra dezi compliment,
 Sezis dre rezoniou ha dre gomzou charmant,
 Ha teón eur cedulen qent return var da c'his,
 Sinet em avantach gant an dorn am languis.

Mæs mar chomfe bepret en e omphiou,
 Degas d'in Lachesis, Attropos ha Cloton ;
 Degas memes ar maro armet a peb gallout ;
 Dre ar maro didruez da rei fin d'am hirvoud.

Erfis bet diganti eul lincel griet mad,
 Eun archet hac eur bez evit fin va laqat ;
 Ha ma car va buez, e devo plijadur
 Da viana d'am maro, o rhei d'in sepultur.

Beza e deus pouvoar da gommard d'ar maro,
 Ha me demeus ma bez a zavo p'am galvo :
 Me zavo ac'hane, ressuscitet gant gloar,
 Evit e admira evel eun eil Lazar.

Biscoas au Ameriq, daouest de oll bompad,
 N'e deus gñelec guenet ger caer, qen d'read,
 Na biscoas an Asi, gant oll fertilite,
 N'e deveus produet hevelep rarente.

Disqen en qær Pempoul, qers dre ru an Ilis,
 Ha tach da flechissa an objet am languis,
 Ha na esperna netra er seurt occasion,
 Evit gouit e speret a rei joa d'am c'halon.

Impalaer puissant, monarq victorius,
 Mab ena an énou, fidelite Venus,
 Laqa en e c'halon ar bir lem am blessas,
 Ma teuy en ber amzer evit ma rentan yac'h.

Me stagouz va brec'h dorn divin Appelles,
 Al liou caer em boutiq bac em penn an adress
 Da denna e fortret da gass d'an Occident,
 Da gass ebars er Sud, en Nord hac el Levant.

Eur mennat a ran c'hoas qent disqen er Menéz ;
 Me a garre plijout da galon ma mestres :
 Rouanez ar Muset, ho pet attention
 Qent ma zin da repos canomp dezi ar zon.